




Lizher Tiegezh Santez Anna

Niverenn 53 Miz Kerzu / Décembre 2023



Skêrijenn e-kreiz an noz

Puer natus est nobis, et filius datus est nobis ! "Ur bugel zo ganet dimp, ur mab zo bet roet dimp !" Setu penaos e kan liderezh Nedeleg. Ha gant darvoud Ginivelezh ar Salver, a-hed ar c'hantvedoù, ez eo bet estlammet kalonoù an dud ha sklêrijennet ar broadoù. Ganti eo bet goulaouet Breizh ha kaeraet he istor.

Ur c'hoziad eus ar vro a gonte din penaos, gwezhall, e-doug nozvezh Nedeleg, e lugerne an hentoù kleuz gant gouleier leternioù ar c'hedourion o tiskenn eus ar menez war-zu iliz Roudoualleg evit oferenn ar Pellgent hag o tistreiñ e-kreiz an noz ; ha kement-se dindan ar seizh avel !

Breizh kristen zo aet diwar-wel. Kalz ne ouzont ken zoken ez eus bet anezhi. Ret eo lavarout ivez ez eus tud o strivañ evit diverkañ an eñvor anezhi... Tristidigezh ar bed ! Na teñval eo e dibenn 2023 !

E Tiegezh Santez Anna, "*dindan mantell santez Anna*", hon eus ar bri da estlammiñ a-grenn-dost da C'hinivelezh Jezuz. Ha ni holl - pe e vefemp er Vreuriezh, pe er Genunaniezh, pe c'hwi ar vignoned ouzh hon gronnañ - hon eus ivez ar gefridi da zougen testeni da zonedigezh ar Salver, "Goulou da sklêrijennañ ar broadoù" (Lk 2,32).

Er bloavezhioù diwezhañ-mañ eo aet kalzik war-raok chanter Lann-Anna. Ar savadurioù rivinet tro-dro d'ar chapel zo ratreet ha toet hiviziken. Trugarez evit ho skoazell deoc'h-holl ! Met chom a ra pep tra d'ober evit ma vefe tu d'o annezhañ ha degas dre-se un sked nevez d'hon abostolerezh.

Ar chapel a vez gweladennet alies endeo ha souezhet eo an dud a zeu d'he dizoleiñ. Ar Vreuriezh en em gav enni bemdez hag e laka da sevel e brezhoneg meuleudi hag aspedenn an Iliz, mouezh Breizh e Kan ar Pbloù dec'hanet gant ar Spered Santel !

Evel ur flammennig e-kreiz an noz, e talc'h eta Breuriezh ar Vouster, diwar briz lies aberzh ha lies striv a gantroidigezh. Er baourentez, gant ar bedenn hag al labour, deiz ha deiz, e ro korf da erbar Lann-Anna ... Trugarez da genderc'hel d'he skorañ !

*

An emvodoù miziek a ro tu d'an tiegezh ledan d'en em strolañ : izili ar Vreuriezh, re ar Genunaniezh ha mignoned : prantadoù stummañ, lodennañ, lidañ, evit kas war-raok hor galvidigezh voutin.

En hañv diwezhañ-mañ, eo bet brav ha bourrus Miz Santez Anna gant an oferenn pergen lidet gant an Tad Mazhev e Lann-Anna hag hon troiad kaer e Bro-Dol ma tleemp pediñ eviti a-hed ar bloavezh-mañ. Trugarez c'hoazh da Erig evit e skoazell vat.

Anaoudegezh broioù Breizh zo anezhi un hent dibar evit dizoleiñ an istor, ar sent, ar glad liestumm, ha neuze mont gant lid meur ar C'heviun deraouet gant ar Pantekost. Kenderc'hel a reomp da skignañ kartenn ar broioù (e gwerzh, 15 euro e Lann-Anna) a zo evel ur prenestr digor evit dizoleiñ Breizh wirion, en tu all d'an dispennadur amaezhel.

Er bloavezhioù diwezhañ-mañ, dre Ragevezh Doue, ez eus bet aotreet dimp ur c'henlabour frouezhus gant an embannadurioù Penkermin. Dic'hortoz a-grenn e oa ! Goude adembannidigezh ar Bibl e 2018, e voe embannidigezh Levr Oferenn ar Sulioù e 2021, ha da-heul, hini ar Sizhun. Emichañs e teuio er-maez ivez al levrenn diwezhañ gouestlet pergen d'ar Sentreizh. Evel-just e

c'hoanagomp e vefe kefleuniet un deiz bennak embannidigezh seurt levrioù liderezhel gant eskobiezhoù Breizh. Met, war a hañval, n'eo ket tamm ebet diouzh roll an devezh ganto...

A-hend-all, echuet eo ganimp azgwelout ar Salmaoueg ha staget d'ober kement-all gant kanennoù ar C'heviun Kozh ha re an hini Nevez a gaver gant Liderezh an Eurioù (Liturgia Horarum) a reomp gantañ. Hag e kendalc'homp gant al labour war ar meulganoù a ganomp, par ma c'hellomp, war ar c'herzennoù gregorian.

Gant al load e c'heller kaout ditouroù a-zivoud an obererezhioù-se ha prenañ al levrioù en linenn. Ha war ar c'henrouedadoù kevredigezhel, en un doare gougelek evit ar poent, e tougomp testeni eus karism Tiegezh Santez Anna.

Al labourioù hag obererezhioù diseurt-se zo anezho kement a c'houleier o lugerniñ e-kreiz an noz evit mont davet an Arloz. Neuze, mignoned vat, a-gevret ganimp, enaout ho leternioù hag it gant ar gwenodennoù en arbenn d'ar Salver ganet evidomp ! Boulc'homp hentoù e-kreiz an noz !



Lumière dans la nuit

Puer natus est nobis, et filius datus est nobis ! "Un enfant nous est né, et un fils nous est donné !" Ainsi chante la liturgie de Noël. Et tout au long des siècles, l'évènement de la naissance du Sauveur a émerveillé les cœurs et illuminé les nations. Elle a illuminé la Bretagne et enchanté son histoire.

Un ancien du pays me racontait comment les chemins creux s'animaient jadis, durant la nuit de Noël, de la lumière des lanternes des veilleurs qui descendaient de la montagne vers l'église de Roudouallec pour la messe de minuit puis s'en revenaient au cœur de la nuit ; et cela sous tous les temps !

Cette Bretagne chrétienne a disparu. Beaucoup ne savent même plus qu'elle a existé. Il faut dire que certains s'emploient à en effacer le souvenir... Triste monde ! Que la nuit se fait sombre en cette fin d'année 2023 !

Dans Tiegezh Santez Anna, "*sous le manteau de sainte Anne*", nous avons le privilège de pouvoir nous émerveiller au plus près de la naissance de Jésus. Et tous - que ce soit dans la Fraternité de Vie, la Communion ou vous tous les amis qui nous entourez - nous avons aussi la mission de témoigner de la venue du Sauveur, "Lumière pour éclairer les nations" (Lc 2,32).

Ces dernières années, le chantier de Lann-Anna a beaucoup progressé. Les bâtiments ruinés autour de la chapelle sont désormais tous relevés et couverts. Merci pour votre aide à tous ! Mais il reste tout à faire pour les rendre habitables et ainsi assurer un nouveau rayonnement à notre apostolat.

Déjà, la chapelle est souvent visitée et suscite l'étonnement de ce ceux qui la découvrent. Tous les jours, la Fraternité s'y retrouve et fait monter en breton la louange et la supplication de l'Eglise, voix bretonne dans le Chant des Peuples suscité par l'Esprit Saint !

Petite flamme dans la nuit, la Fraternité du Moustoir se maintient au prix de bien des sacrifices et d'efforts de conversion. Dans la pauvreté, la prière et le travail quotidien, elle permet au projet de Lann-Anna de prendre corps jour après jour... Merci de continuer à la soutenir !

Les réunions mensuelles permettent à la grande famille de se retrouver, membres de la Fraternité, de la Communion, amis pour des temps de formation, de partage, de célébration afin progresser dans notre vocation commune.

Cet été, le Mois de Sainte Anne a été particulièrement béni avec la messe célébrée par le Père Matthieu à Lann-Anna et notre beau périple en pays de Dol pour lequel nous devons prier tout au long de cette année. Merci encore à Eric d'y avoir grandement contribué.

La connaissance des pays bretons est un chemin privilégié pour découvrir l'histoire, les saints, le patrimoine dans sa diversité, afin d'entrer dans la grande célébration de l'Alliance inaugurée à la Pentecôte. Nous continuons à diffuser la carte des pays (en vente 15 euros à Lann-Anna), fenêtre ouverte sur la découverte de la Bretagne réelle au-delà du dépeçage administratif.

La Providence a permis, durant ces dernières années, une fructueuse collaboration avec les éditions Penkermin. C'était tout à fait inattendu ! Après la réédition de la Bible en 2018, ce fut la parution du Livre de Messe des Dimanches en 2021, puis celui de Semaine. Nous espérons que le dernier tome consacré essentiellement au Sanctoral pourra voir le jour. Bien sûr, nous espérons qu'un jour ce seront les diocèses bretons qui assureront la publication officielle de tels ouvrages liturgiques. Mais cela ne semble pas du tout à l'ordre du jour...

D'autre part, nous avons fini la révision du psautier et nous sommes attelés à celle des cantiques du l'Ancien et du Nouveau Testament présents dans la Liturgie des Heures (Liturgia Horarum) que nous suivons. Et nous continuons bien-sûr le travail sur les hymnes, nous appliquant à les chanter quand nous le pouvons sur les mélodies grégoriennes.

Le site internet rend compte de ces diverses activités et permet la vente en ligne de ces ouvrages. Plus généralement notre présence, encore discrète, sur les réseaux sociaux, témoigne du charisme de Tiegezh Santez Anna.

Ces divers travaux et activités sont autant de lampes qui brillent dans la nuit pour aller à la rencontre du Seigneur. Alors, chers amis, avec nous allumez vos lanternes et lancez-vous sur les routes à la rencontre du Sauveur qui est né pour nous ! Ouvrons des chemins dans la nuit !

